

Yannig an difouper neizhoù

Kavet 'peus da saout 'ta, Yannig, kavet 'peus da saout 'ta ?
N'em eus ket, n'em eus ket, gwelloc'h 'geto, gwelloc'h 'geto,
N'em eus ket, n'em eus ket, gwelloc'h 'geto m'eus kavet.

Petra 'peus kavet 'ta, Yannig ?
Un neizh pig, un neizh vran hag un neizhig laouenan.

Peseurt vioù 'zo e-barzh 'ta, Yannig ?
Unan ruz, unan gwenn, unan glas, unan melen.

Ro unan d'in me 'ta ?
Ne roin ket, ne roin ket, ar re-se 'zo 'vit va gwreg.

Peseurt gwreg az peus 'ta ?
Unan vihan, unan vrav, hag a sav abred atav.

Da bed eur a sav 'ta ?
Etre dek eur ha kreisteiz e sav ar big diwar he neizh.

Petra 'ra da wreg 'ta Yannig ?
Goro 'r saout, o kas er maez, torriñ 'r bodez, skuihañ 'l laezh

Peseurt soubenn 'ra 'ta, Yannig ?
Soubenn besk, soubenn fresk, soubenn vijil alies.

Ro bazhadoù dezhi 'ta, Yannig !
Ne roin ket, ne roin ket, me 'm eus ezhomm eus va gwreg